

Pierre Abelard gant Brigitte Ar Gov

Abaoe ouzhpenn 10 vloaz e vez aozet pourmenadegoù gant KanN gwiniég, ha gant Y-L Badaud, kelenner brezhoneg el Lavreer Botorel.

Met evit petra ?

Dizoleiñ ar vro, ar gwiniég hag aodoù Liger-Atlantel, ha komz asambles e brezhoneg dreist-holl. Dek vloaz zo, daoust d'an amzer fall, o doa divizet 15 baleer kerzhout tro-dro Ar Palez e bro-gwiniég. Deus tosenñ ar Palez e oa posupl da welout-mat ar gwiniég tro-dro hag aspadennoù an donjon savet etre 892 ha 1023 gant duked Breizh. E-barzh an donjon-se e oa ganet ar filozof Abelard e 1079. Bevet o doa Abelard ha Heloise er Palez o buhez-pad. E-pad ar bourmenadeg, dindan ar glav pil, e oamp e lec'h istorel Santez Anna. Chomet e oamp bamet dirak an delwenn pa oa deuet Bilal Hassan gant ur mignon dezhañ dre zegouezh. Souezhus ha plijus e oa war un dro. Pedet e oamp bet e stal-labour Bilal ha Sylviane daou vloaz war-lerc'h.

Met piv eo Abelard ha Heloise ? Piv eo Bilal Hassan ha Sylviane Courgeaud ?

Peseurt liammoù zo etre en dud-se ?

Dibabet en doa Abelard mont da Bariz evit deskiñ ha kelenn an doueoniezh (teoloji) hag ar brederouriezh (filo) goude-se. Ar chaloni Fulbert en doa dibabet bezañ mestr-kelenner Heloise. Siwazh dezhañ, an daou zen yaouank Abelard ha Heloise a oa e karantez ! Ha n'int ket dimezet zoken ! Ur babig 'oa deuet d'ar bed-mañ, ganet ha desavet er Pallez e ti Abelard. Astrolabe 'oa graet anezhañ. Dre-guzh oa bet lidet an eured, met veñjañs Fulbert oa da zont : ar spazhañ (castration) evit Abelard !

Paourkaezh Abelard ! Petra 'oa deuet Abelard da vezañ ?

Goude-se 'oa deuet Abelard da vezañ manac'h, mont a rae d'ur manati d'egile. Pa oa er manati Lokentaz (Sant Gweltaz Rewiz), en doa skrivet « me zo o chom en ur vro sovaj, gouez, ha ne gomprenan ket ar yezh, ur yezh euzhus (re divalav) ». Heloise oa deuet da vezañ ur plac'h lean ivez (relijion). Met atav e kenskrivent : lizheroù a zevosion, a garantez hag a brederouriezh an eil d'eben. Relegoù Abelard ha Heloise oa bet tolpet e 1817 e bered Père Lachaise e Pariz, 'lec'h ma vez gwelet o bez c'hoazh.

Perak 'ta e oa bet kizellet delwenn Abelard ha Heloise gant Bilal Hassan ha Sylviane Courgeaud ?

An dibab oa bet graet gant ar gevredigezh sevenadurel « Per Abelard ». Goulennet o deus digant Sylviane ha Bilal, kizellerien anezho, sevel an delwenn. Dioulet e oa bet d'an 22 a viz Gwengolo 2011, e lec'h istorel Santez Anna er Palez. E-tro daou vetrad tregont a uhelder eo.

Dorn-ha-dorn emañ ar c'houblad, met kein-ouzh-kein emaint evit reiñ ur plas evit un trede elfenn ; an tonkad.

Piv eo Sylviane Courgeaud ?

Ganet eo Sylviane Courgeaud e Naoned. Chomet e oa e-barzh ur manati kristen e Siria e-pad tri bloaz. Ur gizellerez a blij kantreal dezhi eo hi. Kemeret he deus perzh e raktresoù etrebroadel niverus ha diskouezadegoù a bep seurt. Pouezus-tre eo da Sylviane sevel eskemmoù etre pobloù eus sevenadurioù ha speredelezhioù disheñvel

Ha neuze, Brigitte, Bilal Hassan ?

Bilal Hassan a oa ganet e Siria. Desket en deus ar c'haerskriverezh arab ha kizellerezh e skolveur Damas. Goude en deus studiet teknikoù an arem e Orange (e Bro-C'hall). Anat ha pouezus eo dezhañ eskemm ha treuzkas e skiant-prenet. Kelenner war ar c'haerskriverezh arab e oa betek 2005 ivez.

Petra 'vez graet gant Bilal Hassan bremañ ?

Dre m'eo sot gant kizellerezh an arem e krou Bilal delwennoù a bep seurt, e arem, liesparzh, e pri poazh, e kroc'han, hag e plastr. Posubl eo d'an dud chom bamet dirak e zelwenn eus Santez Klervi e Traoñienn ar Sent e Karnoed abaoe 2016. Dirak kalz a oberennoù ha diskouezadegoù e pep lec'h e Europa, e Bro India, hag er Reter Kreiz ivez. Kizellañ a ra Bilal Hassan evit terriñ e ezhomm frankiz. Ur seurt dichekadenn eo pep oberenn. Brudet-kenañ eo an arzour etrebroadel-se. Pell zo dija e oa bet aozet ar bourmenadeg-se, met posubl eo dizoleiñ lec'hioù dedennus-tre atav e Champtoceaux pe Sant Brewenn ar bloaz-mañ, da skouer.